

Ar Vran hac ar Louarn.

Voar an ton : **Tra deri dera, tra la la.**

Eur vech eur Vran coz ral, var eur blanten perchet,
A zalc'he en e vec eur fourmajen scornet ;

Pa zantas ar houez-se, eul Louarn nemeur bras
A zostas polimant, a dar Vran lavaras :

Var ton an tra la la la, var ton an tra la la la,
Var ton an tra deri dera, tra la la.

— Ah ! bonjour ta, Vran quez, a penos a rit-hu ?

— Me non quet fal, merci, laras ar Vran dustu ;
A va oll bugale, nemerd ar c'hantekyet

Pehini gand ar scorn a so goal enrumet.

Var ton an tra la la la, etc.

— Min toue vad, Vran quez, c'hui so goal brao guisquet,
Dre sur en ker Paris e ve gret o tillet.

— Ya, respontas ar Vran, pa glevas ar gomz-se,
Rac en ker Lanhon ne visquer qet guis-se.

Var ton an tra la la la, etc.

— Ho ! mar canit quen brao evel oc'hu guisquet,
Neus quet er baros-mâ caner vit o heuillet.
Canet-ta dem, mar plij, pe cantic, pe chanson,
Ni glevo ac'hanoc'h gant cals attention.

Var ton an tra la la la, etc.

Pa glevas ar frim-se, ar Vran, digomplimant,
A ganas eur chanson tost diligentamant.
Racial pa gomanças, pa ne oa quen dalhet,
A goeas eus e vec e fourmajen scornet.

Var ton an tra la la la, etc.

Al Louarn, laouen bras, pa velas an dra-se,
Lampus var ar fourmaj, ac en debas, ma fe.
Neuse e lavaras dar Vran disconcertet :
— Ne ousoc'h quet cana, noc'h quet tam brao guisquet.

Var ton an tra la la la, etc.

